


# EMSAV

*Disfavor  
EJB p 170  
Bouvezat  
Bouvezat  
treasure  
Kavazep*



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 7 - Gouere 1967

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F  
Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV  
30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

---

T a o l e n n

Hag-efñ e c'hell an Emsav kaout ur politikerezh diavaez war hir dermen ? . . . . .	p. 161
"Kornog" (arroud) . . . . .	p. 167
Penaos anaout an Emsav war an dachenn ? . . . . .	p. 168
Hent ar sokialouriezh e Breizh . . . . .	p. 172
"Ar Falz" (arroud) . . . . .	p. 177
Notennoù armerzhel (7), elfennoù ar c'henderc'hañ . . . . .	p. 178
Kemennoù a-berzh S.A.D.E.D., Kelc'h Debauvais . . . . .	p. 188

HAG-EN E C'HELL AN EMSAV KAOUT UR POLITIKEREZH DIAVAEZ  
WAR HIR DERMEN ?

Breizh nag an Emsav n'emaint o-unan er bed; n'int ket kennebeut-all serret en un toull-bac'h hep gwel ebet war an diavaez. Gwir eo moarvat ez eo bet diskouezet an Emsav gant hon enebourion evel ul luskad disrannour hepken, dastumet warnañ e-unan, evel ur c'hilstourm a emzifenn dibellweled hag aner a-enep da nerzhoù an dazont. Seurt tamalloù direizh a vefe mat dizarbenn.

E gwirionez n'eo ket mennet an Emsav tamm ebet da sevel en-dro da Vreizh un doare moger Sina a zisrannfe Breizh diouzh ar bed. Hevelep "uhelbal" ne vije evel just nemet ur sorc'henn. Disoc'h an Emsav eo er c'hontrol pourchas da Vreizh an digoradur war ar bed a ra diouer dezhi adal ma chom serret e-barzh ar Stad C'hall evel en ur c'harc'har (1).

An digoradur-se a denn da gentañ da adstagañ an ereoù etre Breizh ha broioù keltiek tramor a zo bet torret da heul darvoudoù an Istor. Diwar vremañ e tle an Emsav ar muiañ ma c'hell skoulmañ darempredoù stank gant emsavioù broadel ar broioù keltiek all. Laosk a-walc'h, ret eo anzav, ez eo bet an darempredoù-se betek-henn. Startaet e tleont bezañ.

Hogen kement-se ne vo nemet un derou. Ur wech ma vo bet adsavet pep a Stad er broioù keltiek, e vo da sevel etrezo, diouzh ma vo tu, ur framm dezvel (2) a roy d'ar c'hevread keltiek krouet diwarno ur bersonelezh etrevroadel. Finvez ar seurt kevread a vo kreñvaat mouezh ar Gelted en Europa hag er bed. Menegiñ ar pal ne reomp ken amañ, hep gallout resizañ doare ar framm politikel a vodo ar broadoù keltiek en ur reif dezho ur bersonelezh a-ziforc'h e-keñver strolloù broadoù all e diabarzh Europa. Anat eo e c'houlenno ar framm-se evit diwanañ,

kreskiñ ha kemer nerzh, ur striv hir, pennek ha dalc'hus.

Evit pezh a sell ouzh an emsavioù broadel all a zo oc'h oberiañ en Europa ar C'hornog abaoe ar c'hantved tremenet, e Katalonia pe Euzkadi, ez eo reizh e kendalc'hfe an Emsav da gaout ganto an dar-empredoù hengounel a zo bet diazezet a bell 'zo; strolladoù ar broioù-se a stourm e diabarzh ur framm impalaerel krisoc'h eget an hini ma'n em gavomp; o enebourion zo ivez hon enebourion.

Kemend-all zo da lavarout a-zivout ar broioù okitanek, hogen en degouezh-mañ e ranker resizañ ha teurel evezh mat. Betek-henn ne oa er broioù okitanek nemet luskadoù rannvroel, ha dic'hallus-krenn e oa d'an Emsav kenlabourat gant aozadurioù seurt-se. Hiziv an deiz, ez eus o tiwanañ un Emsav broadel okitan gwirion, petra bennak ma chom dister-tre e nerzh. Gantañ, betek gouzout, e ve tu da genoberiañ, dreist-holl peogwir hon eus da stourm ouzh an hevelep beli impalaerel a glask distrujañ hor broadoù. Amañ adarre, avat, e ranker diwall. Daoust da bep tra e chom ar broioù okitanek broioù roman ha natur e vo d'ar Stad pe d'ar Stadoù broadel a vo savet ganto en em glenkañ en ur framm kevreadel gant ar Stad C'hall endeeun. Ne ve ket fur d'ur vroad keltiek chom stag a re dost ouzh Stadoù german pe latin. Mar'd eo tonket d'ar broioù keltiek bezañ klenket en ur framm dreistbroadel, e rank ar framm-se bezañ da gentañ ur c'hevread keltiek.

Hevelep kevread a-hend-all, evel an hini gall-roman pe spagnat, a ranko bezañ klenket er gumuniezh europat. Ha diwar vremañ e teuomp da bleidiñ gant kudenn ar Stadoù impalaerel bet savet en Europa abaoe ar c'hwezekvet kantved dreist-holl hag an darempredoù a ranko kaout ganto ar broadoù kozh adsavet. Lavarout e vo klenket ar framm-ou kevreadel er gumuniezh europat a lavar ivez ne vo ket disrannet Breizh diouzh Bro-C'hall muioc'h eget diouzh ar broioù europat all. Pa na ve nemet en abeg d'an douaroniezh e chomo Bro-C'hall, dreist-

holl al lodenn gornok anezhi, ur vro nes da Vreizh (Bro-C'hall a fell deomp envel ha n'eo ket ar Stad C'hall a-vremañ, a zo ur Stad impalaerour hepmuiken). Rak-se enta e ranko Breizh diorren gant Bro-C'hall darempredoù politikel, armerzhel, sevenadurel a amezeg-iez. Un devoud nevez e vo an darempredoù-se rak, evit ar poent, lakaet er-maez an darempred a zalc'herezh, n'eus tamm darempredoù etre Breizh ha Bro-C'hall dre an abeg ma n'eus c'hoazh Stad Vrezhon ebet, da lavarout eo kendivizer brezhon ebet a-dal d'ar c'hendivizer gall.

X En dro-mañ adarre n'eus ket anv a zeskrivañ dre ar munud doare an darempredoù a c'hello bezañ etre Breizh ha Bro-C'hall. Merkomp hepken e vo diferet ar re-mañ gant daou ampleg : a) war an hevelep rez en em gavo Breizh ha Bro-C'hall e diabarzh ar framm dreistbroad-el o c'hlenko; da lavarout eo o devo an div vro darempredoù a-zremm ha n'eo ket darempredoù a-zerc'h, - evel ma c'hoarvezfe, unan eus an div vro o vezañ isurzhiat d'eben, en ur Stad C'hall kevreat a seurt gant an hini hunvreet gant ar M.O.B.; b) enframmet e vo an div vro en hevelep kumuniezh, ha bonreizh (3) ar gumuniezh-se eo a zifero ment an dishualded a zegouezho da bep hini eus hec'h izili. Gwelout a reer enta en diwezh ne c'haller ket meizañ emgav ar Stad Vrezhon e framm ar gumuniezh-se hep meizañ da gentañ natur ar gumun-iez hec'h-unan.

Amañ eo e sav an diaesterioù. Lod a c'hoanag e vo diskoulmet kudenn Vreizh dre savidigezh Europa end-eeun hag e kement-se dres ez int faziet ivez. Moarvat e c'hellomp arvestiñ hiziv an deiz ouzh savidigezh un Europa bennak, hini an armerzh pe ar C'henvarc'had. Hogen da neb a sell pizh ez eo sklaer ez eo tonket d'an Europa-se c'hwitañ ma ne chom nemet un Europa armerzhel, dre'n arbenn ma'z eo ar politikerezh en diwezh mestr an armerzh. E gwir, ned eo ar gumun-iez armerzhel europat nemet ur skramm ma klask an holl Stadoù impalaerel hengounel europat a-drefiv dezhañ kuzhat o mennadoù a-vis-

koazh. Da skouer, klask a ra ar gouarnamant gall sevel un doare Ruhr nevez en-dro da bParis a-benn pakañ krog e stur ar gumuniezh war-c'hoazh dre hent an armerzh. Moarvat ez eo gwell e kevezfe ar riez-ou-se war dachenn an armerzh eget war hini an armoù evel m'o deus graet ken alies en tremened. Hogen war hir dermen emañ seurt kevezerezh en arvar da deurel frouezh kontammet evit ar gumuniezh hec'h-unan. Da skouer, adarre, impalaerouriezh giz nevez Bro-C'hall he deus broudet endeo un adsav d'ar spered impalaerour en Alamagn m'eo an diskouezataenn anezhañ savidigezh an "Deutsche National Partei". Er Stad C'hall hec'h-unan emañ an impalaerouriezh, - azonet gant savidigezh ar Ruhr bariziat ha darbaridigezh ar bombez atomel, - a-zalc'h ouzh isdiorreadur "ranndiriou" an trobarzh (4), evel Breizh. A-benn lemel ar gwalloù-se e vefe ret da Frañs ha d'ar riezou kozh a Europa kemmañ o folitikerezhioù, dilezel o c'hevezerezh, degemer ur raklun (5) a gendiorreadur evit Europa a-bezh. Nac'het e voe avat betek-henn nep raklun eus ar seurt gant riezou bras Europa, gant Frañs pergen pa argasas ar c'hinnig arc'hant-kred evit Breizh graet gant ar Glad Diorren Europat nevez 'zo.

Hogen daoust ha gallus eo an dra-se ? Amañ eo e tostaomp ouzh dalc'h ar gudenn, a zo hemañ : hag-eñ emañ e galloud riezou Kornog-europa kemmañ diouto o-unan o folitikerezh impalaerel ? A dra sur ne c'hellont ket dont war o c'hiz hep kouezhañ en o foull : o emdro-adur a-bezh, adalek o ganedigezh betek ar veli o doa kemeret war ar blanedenn a-bezh, betek ar stourmadoù a renont kenetrezo en enkadennoù o diskar, zo bet un embregerezh impalaerel. Sentiñ a rankont ouzh o saveladur (6) ken strizh hag ul loen ouzh e natur betek par e varv. E gwirionez ne c'hell ar politikerezh impalaerel, kevezerezh etre ar riezou bras ha mac'herezh ar broadoù-suj emamp o paouez deskrivañ bezañ kemmet pe gentoc'h lamet nemet da heul un torratur. Neb a zistag ar ger torratur avat a lavar ivez dispac'h. A-benn ar fin ne c'hell bezañ savet an Europa o deus ezhomm ar broioù

a seurt gant hon hini nemet da heul an dispac'h.

Hogen an dispac'h-se n'eo ket eus Bro-C'hall, nag eus Bro-Saoz, nag eus Bro-Alamagn e c'hell dont. Ne c'hellont dont nemet eus Breizh pe eus broioù bihan heñvel outi, keltiek, okitanek, euzkarek, katalanek, gant harp broioù bihan all perc'henn endeo d'o Stad. Hini ebet eus ar broioù-suj ne c'hellont en em zivazhyevañ ha diazezañ ur Stad vroadel hep nac'hañ a-grenn an hengoun istorel a zo bet gwrizienn ha sabr ar Stadoù impalaerel. Adsavidigezh ur Vreizh vrezhon a glozo Istor Frañs, - n'eo ket hini Bro-C'hall; adsavidigezh Kembre hag Alba a glozo Istor Breizh-Veur, - ha n'eo ket hini Bro-Saoz; adsavidigezh Katalonia hag Euzkadi a glozo Istor Spagn, - ha n'eo ket hini Kastilha.

Hevelep kerzhad istorel, a c'hell bezañ gorrek ha kemer hir amzer, ne vo ket dizañjer evit Breizh hag Europa a-bezh. Ha setu perak : bez' ez eus en Europa hiziv an deiz un doare kempouez etre riezoù peuzkevatal, dezho uhelc'hoantoù a gozh pe a nevez. Mar disteraer galloud unan eus ar riezoù-se, emeur war var da reiñ lañs d'unan all a glasko d'he zro diogeliñ he mac'homerezh war ar c'hev-andir-mañ. A zo gwashoc'h, Breizh hag hec'h Emsav, koulz hag ar broioù bihan all hag o Emsavioù, a glaskor implijout a-benn kempañ kempouez Europa a-du gant hini pe hini eus ar broioù impalaerel a gendalc'h da gevezañ enni. Darbet eo bet d'an dra-se c'hoarvezout endeo e-kerz ar brezel diwezhañ.

Bremañ ivez e rankomp spisaat unan eus sturiennoù politikerezh diavaez an Emsav : un dlead groñs eo d'an Emsav dilezel ar mennad da zont tre e c'hoari ar riezoù impalaerel a-vremañ, en deiz, lakaomp, m'en devo kemeret nerzh a-walc'h evit c'hoari ur roll europat; kendonkad eo Breizh d'ar broioù-suj all, hag e nep degouezh ne zleo mont war ar renk gant ar galloudoù sujer, - da skouer o klask kevrederezh ur riez impalaerel a-enep d'ur riez impalaerel

all, ha pa ve houmañ an hini c'hall. Hiziv e rafe un direizh dam-heñvel, - hep menegiñ ar fazi kadoniezh (7), - ar Vrezhoned a rafe bruderezh evit Alamagn unvan war an diviz ma rafe dalc'herion an adunvanidigezh-se en Alamagn brud en-dro da vennad ar vroadelourion vrezhon en eskemm. Diwanidigezh ur riez alaman a gant milion a dud avat ne rafe nemet broudañ gwashoc'h c'hoazh ar c'hevezerezh etre ar riezou impalaerel en Europa hep degas gounid ebet da Vreizh na da vroad-suj all ebet. Diwall a rankomp diouzh pep politikerezh a dennfe da greskiñ galloud nep riez impalaerel en Europa hag er bed. Hetiñ a zleomp er c'hontrol kresk an nerzhoù enebimpalaerel a c'hell diwanañ e-barzh ar riezou-se, en hini c'hall koulz hag en hini alaman.

Moarvat e vo tamallet da seurt politikerezh nac'hañ degemerout an traoù evel m'emaint, ha dre-se bezañ dibleustrek. Respont a reomp ez eo dres aze natur ar mennad dispac'hel. War verr dermen e hañval an tamall-se bezañ reizh, rak ne vo ket tizhet diouzhtu ar pal hon eus merket. N'eo ket dic'hallus kennebeut e ve diskoulmet pe zamziskoulmet kudenn Vreizh evel hini Iwerzhon a-barzh ma vo diskoulmet kudenn Europa. Moarvat ez eo ar gudenn europat en he fezh dreistdiraez deomp. Hogen dre skoueriañ broioù bihan all en Europa, - ha kemer skouer diwarno, - e c'hell Breizh luskañ ganto un emroadur a zisoc'ho war hir dermen da ziazezañ ur sevenadur nevez en Europa.

---

(1) Sl. R. HEMON, Breizh hag ar bed, Breizh Atao 1923, ademb. Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh 1931, p.19. E diwezh ar pennad e lenner :

"Ur Vro, da lavarout eo ur C'horf hag ur Spered, dizalc'h-kaer e-mesk ar broioù all, hag o klask e-lec'h ma kar hent ar mad hag ar wirionez.

"An hent-se ne gavimp biken ma n'anavezomp ket ar Bed.

"D'al labour eta, kement hini a c'hall, da zegas da Vreizh arz, skiantoù ha furnez ar Bed, n'eo ket evit mougañ hor sevenadur-ni; evit e binvidikaat kentoc'h. Dreist-holl evit hon digabestrañ diouzh spered Bro-C'hall; evit diskar ar voger he deus

savet en-dro dimp, gant prenestroù bihan na welomp drezo nemet ar pezh a gar."

(2) Un dezv zo anezhi ul lezenn, ha dreist-holl ul lezenn-diazez; dezvel a dalvez enta : diferet dre lezennoù, reizh e-keñver al lezenn.

(3) Bonreizh b., reizhennoù-diazez ur riez, ur c'hevread riezoù, h.a.

(4) An trobarzh zo al lodenn lec'hiet war an dro; abaoe un nebeut bloavezhioù eo bet rannet tiriegezh Frañs e Ranndirioù Steuñvel (Régions de Programme) na glotont na gant ar rannbarzhioù douaroniezhel, na gant ar rannvroioù a-wechall (Ranndir Steuñvel Bretagne zo ennañ pevar eus ar pemp departamant treset war diriegezh Vreizh gant an dispac'h gall; aliet eur da dremen hep ober gant ar ger Breizh evit envel ar Ranndir Steuñvel Bretagne; met da ober pe gant an anvad ent-hir, pe gant ar pennlizherennoù anezhañ hepken : R.S.B.)

(5) Raklun g., taolennadur savet en a-raok evit ul labour da seveniñ.

(6) Savelañ a dalvez diazezañ, lakaat da wir. Saveladur un dra bennak a dalvez an diazezadur anezhañ, hag ivez an doareoù, ar c'henreizhadur anezhañ evel m'int bet diazezet.

(7) Ar gadoniezh zo skiant an emgannoù, da lavarout eo an hini a studi an doareoù pleustrek da ren an embregerezhioù-brezel war an dachenn ha diouzh an degouezhioù.

"Ene Kornog a zo bev c'hoazh. Chom a ra dezhañ ar pobloù o deus miret divoulc'h, e-kreiz ar gwall reuz hag an droukverzh, o vertuzioù gwechall, n'o deus ket diviet c'hoazh o gred nag o fiziañs, a zo manet yaouank a gorf hag a spered. N'eo ket hep abeg e vez entanet, eus an hanternoz da Europa d'ar c'hreizteiz, hag eus ar c'hornog d'ar reter, kalonoù paotred ha merc'hed, a bep renk hag a bep stad, ma fell dezho, hep gouzout mat alies perak, saveteiñ o gouenn, oc'h anaout, mar bez kollet, e vo ur c'holl evit ar bed-holl. Emsav ar pobloù gwasket evel ez eus kant vloaz, hogen hiziv kalz kreñvoc'h, petra eo nemet ezhomm don Kornog da neveziñ ? Neveziñ, pe vervel; kemañ e spered pe vervel; kemañ e galon, pe vervel. Evel-se, pa zifennomp Breizh e tifennomp Kornog. Hor youl n'eo ket hor youl ez eo, hogen youl ar C'huzh-Heol en hor c'hreiz".

Roparz HEMON, Kornog, Breiz Atao, Mae 1924;  
ademb. Ur Breizhad oc'h... p.64

## PENAOB ANAOUT AN EMSAV WAR AN DACHENN ?

Gant talbenn kantadoù a gevredigezhioù emañ meneget anv Breizh. Un arouez vat eo marteze; un dra fall ivez en arbenn da niver bras an dud yaouank a vez sunet bep bloaz gant ar spoueenn ganttoullek-se ha kollet evit an Emsav. Koulskoude na daolomp ket re vuan ar bec'h war ar bodadoù a virfe ouzh yaouankiz ar vro a anaout an Emsav, rak zoken p'he deus tro ar yaouankiz da gejañ gantañ, n'en em ziskouez ket an Emsav outi evit ar pezh ez eo.

Un dra zo : ne oar ket an emsaverion termenañ an Emsav. Paliou an Emsav a anavezont, hogen pa rankont dibab war an dachenn petra zo Emsav ha petra n'eo ket e vanont gwall ziasur ha rannet kenetrezo. Gant reoù e franka an harzoù betek gronnañ ar C'helc'hioù Keltiek, ar C.E.L.I.B., h.a.; gant reoù all ne chom e-barzh nemet un dornadig obererion hepken : diouzh un tu ar spered a unvaniezh, diouzh an tu all ar spered a c'hlanded, - biskoazh hevelep kevezerezh a vertuzioù ! Kentañ vertuz da gaout emañ avat eo gwelout sklaer. An dispisweled a glasker kuzhat a-dreñv vertuzioù n'o deus netra d'ober en degouezh.

Amsklaer eo evit gwir bevennoù an Emsav, mar o c'heñverier da skouer gant bevennoù ur riez. Anat eo an abeg : an Emsav n'eo ket ur gevredigezh diazezet, met un embregerezh-diazezañ. Enni hec'h-unan emañ pal ar riez. En dazont emañ pal an Emsav.

An diforc'h-mañ diwezhañ a laka anat fazi ar re a dres bevennoù d'an Emsav etre an dud pe etre ar strolladoù. Klask a reont bonnañ an Emsav dre sellout ouzh e stad-bremañ, ouzh ar remziad-bremañ, evel pa vije da gavout eno ar gwel fraezh na vo kavet nemet en diazezadur end-eeun a glozo amzervezh an Emsav. En hent emañ an Emsav; evit e gompren e ranker sellout ouzh an hentad a-bezh. N'eo

ket a-walc'h sellout ouzh hor c'hempredidi : pobl Vreizh n'eo ket hepken ar remziad-bremañ, met hollad ar remziadoù tremenet, bremañ ha da zont. An Emsav e-unan ne c'haller ket anaout dre sellout ouzh hor remziad hepken, rak an hollad ez eo eus ar pezh a voe, a zo hag a vo an Emsav. Pe, <sup>er yezh</sup> er yezh resis, gant ar sell treadegel e tleer klokaat ar sell kevadegel (1).

Kentañ atersoù a zeu d'ar spered eo ar re-mañ : pe liamm zo d'an Emsav eus ur remziad d'egile ? Petra a ra anezhañ un unvez ? A belec'h e teu dezhañ e genstagded ?

Amañ eo dav dimp reiñ un nebeut termenadurioù. Greomp kenvezañ eus ar c'heñver a zo etre obererezhioù daou gempredad n'o deus ket darempred etrezo na levezon an eil war egile. Greomp kedvezañ eus ar c'heñver-se pa c'hoari levezon an eil war ober egile, - ar genlevezon-se o vont e degouezhioù 'zo betek ar c'henlabour, pe c'hoazh betek kendeuzadur an daou obererezh en unan.

Ur c'heñver all a zo, un tammig diaesoc'h da zisplegañ, evitañ da vezañ pouezus-bras. Sellomp da skouer ouzh ar c'heñver etre labour VALLEE, pe gentoc'h Breuriezh ar Brezhoneg ha Gwalarn. Boas eur da lavarout e kemeras Gwalarn diazez war labour ar Vreuriezh; mat eo resisaat : daou dra a zegemerar Gwalarn digant ar Vreuriezh, he mennadoù brogarour, ha frouezh he labour, ar yezh unvan. Diwar ar mennadoù brogarour e tiorreas ur vuhez spered brezhon hollvedel; ar yezh unvan a yeas da zanvez-krouiñ al lennegezh vrezhon arnevez. Ken ma c'hellomp sellout e pep ober, e pep ober emsavel da nebeutañ, un diavaez hag un diabarzh, an diavaez o vezañ ar frouezh douget gantañ, an diabarzh o vezañ an endoniad oberoù tremenet bezant ennañ (2). Greomp bonvezañ (bon = diazez, gwrizienn) eus ar c'heñver-se etre an oberoù tremenet hag an ober-bremañ pa zalc'h an ober-bremañ an oberoù tremenet en e endon, pe, evel ma lavarer c'hoazh, pa wrizienn an ober-bremañ en oberoù tremenet (3).

Dre ar bonvezañ eo e c'hell un emsav padout a remziad da remziad. Dre berzh ar bonvezañ ivez e ra berzh hag ez a war-raok, pa gresk a remziad da remziad an endoniad a oberoù bev bezant en e oberoù pemdeziek.

Dielfennañ an Emsav zo enta dielfennañ da gentañ an endoniad-se, ar bonveziad-se. Dezrannañ a reer ar "gwiskadoù" anezhañ, a zo war un dro kammedoù an Emsav a-dreuz ar bloavezhioù : an emskiant

vroadel arnevez, frouezh ober remziadoù an 19t kantved; ar brezhoneg yezh vroadel unvan, frouezh ober remziadoù derou an 20t kantved; an den brezhon nevez ha termenadur e bal, ar vroad vrezhon nevez, frouezh ober remziadoù eil palevarzh ar c'hantved. Lavarout a c'haller ez a an Emsav war-raok hag e ra berzh, pa vir da vat pep remziad en endon e ober frouezh trec'hioù ar remziadoù-kent.

Dre-se e ranker dezvarn pep ober politikel diouzh an div bennelfenn-mañ :

*D. J. Storer  
EJ/B*

- ar bonveziad anezhañ; un ober emsavel ne c'hell ket lakaat en arvar parzh ebet eus bonveziad an Emsav; enebemsavel e ve un ober a zegemerfe pep tra nemet an emskiant vroadel, pe pep tra nemet ar yezh pe ar yezh unvan, pe c'hoazh pep tra nemet ar pal krouiñ ur vroad nevez;

Kompren a reer ivez ned eo ket oberoù ur remziad tremenet da vezañ barnet evel ma varner oberoù ar remziad-mañ; ne c'haller ket rebech da VALLEE bezañ bet rannvroelour betek 1920, pa n'edo ket c'hoazh termenadur pal politikel an Emsav e-barzh bonveziad ober emsavel ar mare-se. Bremañ avat, en enep, p'eo bet tremenet ar pal-se ez eo dizegemeradus a-grenn pep rannvroelouriezh.

*X*

- ar vonvezusted anezhañ, da lavarout eo e c'halloud da vezañ d'e dro bonveziad, gwrizienn da oberoù da zont.

Gant ar selledoù-se omp degaset d'ur meizadur spis ha pleustrek eus an Emsav. An Emsav n'eo ket ur strollad tud a vefed evit didoueziañ diouzh braz ar boblañs dre verzout warno un azon-diforc'hañ splann; an Emsav n'eo ket muioc'h ur mennoz pe ur c'horf a vennoziou a glaskfed lakaat da dalvezout. Ur c'horf a oberoù eo, ereet strizh dre geñverioù kedvezañ ha bonvezañ. Un unvez kenstag diouzh ar sell kevadegel, ha dreist-holl diouzh ar sell treadegel.

Laosk eo bet e-pad pell amzer ar genstagded kevadegel en Emsav, al liammoù a genober skoulmet etrezo gant an emsaverion eus pep remziad o chom hiniennek, dibad, bresk en holl. N'eus nemet abaoe pemp bloaz e labourer a-zevri da ziazezañ frammoù a anien stadel, - ha ma roer dre-se korf start d'ar genstagded kevadegel.

*Cohesion  
synchronique*

Pouezomp war ar perzh-mañ eus an Emsav : bezañ un unvez kenstag diouzh ar sell treadegel, - pezh a lavarer c'hoazh : bezañ ur furm amzeriek. Unanet emañ ennañ dre ar bonveziad an tremened, ar bremañ hag an dazont. Dre hon oberoù ez anavezomp endeo ar vroad nevez brezhon, rak diouzh an hevelep andon, diouzh an hevelep bonveziad hag int e strinko.

Heuliadoù niverus a denner eus an termenadur-se, an daou-mañ da skouer :

- arvarus eo tresañ ur gartenn eus an Emsav, o reiñ da dud 'zo ha da luskadoù 'zo an titl a emsaver hag ouzh e nac'h ouzh re all; ne c'haller anaout nemet oberoù emsavel hag oberoù nannemsavel;
- ne vezer ket ezel eus an Emsav evel ma vezer keodedad en ur riez : ne vezer ket ganet emsaver, evel ma vezor ganer Brezhon pa vo diazezet ar Stad; an Emsav zo oberoù hepken, ha ne vezer en Emsav nemet kement ha ma severer oberoù emsavel.

(1) Kevadegel (adeg = mare, ampoent) eo ar sell troet ouzh un teskad darvoudoù c'hoarvezet holl en hevelep mare; treadegel ar sell a ya diouzh heul an darvoudoù en amzer, diouzh dibun an Istor.

(2) Sl. An Emsav evel ober hag evel Istor, Emsav 5/105.

(3) Sl. Pelec'h gwriziennañ ?, Emsav 6/129.

## HENT AR SOKIALOURIEZH E BREIZH

Lennet hon eus an daou bennad embannet nevez 'zo war Ar Vro hag Al Liamm (1) gant an U.D.B., pe gentoc'h gant ABERWAN en anv an U.D.B. Ha div vartezeadenn hon eus graet :

- pe emañ an U.D.B. e soñj kenderc'hel da ren he labour e galleg hag ober bruderezh e brezhoneg;

- pe emañ o tont d'ar brezhoneg evit he labour-diazez, en ur genderc'hel gant ar bruderezh e galleg.

Mar embannomp ar pennad-mañ, ez eo peogwir e tegemeromp an eil martezeadenn d'ar wirheñvelañ.

E lec'h all e vo kavet munudoù war istor ha roll-mennadoù an U.D.B. Merkomp e berr : e 1963 e tivizas un darn eus tud yaouank ar M.O.B. en em zispartiañ evit sevel ur gostezenn bolitikel wirion. Fellout a rae dezho :

- pellaat diouzh dibolitikelezh ar M.O.B., hag ober politikerezh fraezh; embann a rejont bezañ sokialourion;

- pellaat diouzh laoskentez frammadur ar M.O.B.; lakaat a rejont ur genurzh strizh da ren en o strollad.

E-kichen ar mennadoù yac'h-se e chome ur gwan bras ganto. Hag unan grevus e oa : ne gemerent ket diazez war an Emsav. Daoust ma enskrivent "galvidigezh vroadel Breizh" en o fennaennoù (2) e sellent ouzh Breizh douaroniezhel (3) hepken, ha n'eo ket ouzh ar c'horf istorek a zo koulskoude lec'h nemetañ ar c'halvidigezh vroadel-se, an Emsav.

Mennet e oant da "zifenn ha diorren ar bersonelezh vrezhon e-keñver politikerezh, kedvuhez ha sevenadur" (4), met ne spisaent ket hag e diabarzh ar stern kozh eo e lec'hient ar pal-se, pe er

c'hontrol en ur stern nevez oc'h amplegañ un dispac'h broadel, distrujidigezh ar framm gall e Breizh ha krouidigezh ur framm brezhon. Padal, hep ar spisadur-se e oa dic'hallus reiñ ur ster d'o mennad; rak, en degouezh kentañ e verk an termen "sevenadur", "culture" kentoc'h, ar sevenadur gall (ha, lakaomp evit eñvor, aspadennoù stuzegezh keltiek maeziou ar C'hornog (5), skritellet "culture populaire"); en eil degouezh e verk ar sevenadur brezhon, hag eñ c'hoazh en egin (6) gant an Emsav. Gant an dispister-se ne save forzh penaos kudenn vallus ebet da izili ar gostezenn nevez peogwir e labourent e galleg. Lavarout a c'haller ne oant ket gouest da zirouestlañ pep tra diouzh an taol kentañ; kudennoù 'zo, evel hini an dispac'h hag ar sevenadur, a virent dindan ur golo a youloù mat evit diwezhatoc'h...

Alese an emzalc'h forc'hellek a ziskouezent ouzh an Emsav. E-lec'h ar c'horf fetis a oberoù istorek (7) ez eo, termenet mat ha sterleun e-keñver an dazont, ne ouient gwelout ennañ nemet ur strewad a luskadoù enebet kenetrezo, ha ne oant ket evit ober o dibab. Dre-se e klaskent tremen ar muiañ gwellañ hep kaout d'ober ouzh an Emsav; ha pa rankent e zaremprediñ, e choment en entremar : ne gredent ober diforc'h ebet etre an Emsav hag al ledemsavioù (8), ha dre zamant d'an eeunded moarvat en o renkent war bazennoù kevatal.

E gwirionez e kavent gwell bezañ er-maez eus an Emsav. Abegoù all o doa, ha hemañ : o meno e oa ne sevenser labour ebet hep ur framm start hag ur genurzh strizh, ha rukuniñ a raent ouzh al laoskentez vezhus a rene e pep lec'h en Emsav. Nemet o pellaat diouzh an Emsav e kollent an tu nemetañ a zo e Breizh da wriziennañ (9). Embann a raent bezañ sokialour ha brezhon, hep merzout e oant gall da gentañ evel kement hini ac'hanomp a zo tremenet en ardivink-stuziañ galloudus ez eo ar skol c'hall. Daoust pegen truezus ez eo an Emsav, n'eus nemetañ barrek da zispenn an den gall ennomp ha da c'henel en e lec'h an den brezhon nevez. Ne skuizhimp ket o lavarout:

ne c'haller bezañ Brezhon hiziv anez bezañ an den brezhon krouet gant an Emsav. Sokialour e c'hell bezañ ar Brezhon douaroniezhel, ne vo nepred dioutañ ouzhpenn ur sokialour gall.

Gant pennadoù ABERWAN e fell dimp gwelout ar meneg emañ an U.D.B. o'n em zizober diouzh ar gwan grevus-se. Ha setu perak :

- e brezhoneg eo savet ar pennadoù, - hag e brezhoneg reizhskrivet, n'eo ket didalvoud henn merkañ pa ouzer e voe an doare-skrivañ unan eus doareoù ar galloud sujer da engehentiñ al ledemsavioù;

- arouezius eo ivez endalc'h ar pennadoù : a) ober a reont stad reizh eus an Emsav hag eus ar c'heñver istorek etre an Emsav ha pobl Vreizh b) lakaat a reont an U.D.B. e-barzh an Emsav, o reifñ dezhi da dremenad tremened an Emsav e-unan (10).

Rannomp, evit ar studi, ar pezh, er pennadoù-se, a denn d'an Emsav, hag ar pezh a denn d'ar sokialouriezh.

### An Emsav

An Emsav zo "gward-araok Breizh da zont, askre ha mouezh ur vro wasket" (11). A-zivout pal an Emsav e lenner ivez : "Dav eo () lakaat () ar stourm evit Breizh e red an emsavioù a zo o fal, dre ar bed, dieubiñ ar pobloù-suj en ur adsevel an den, korf ha spered" (12).

Komzoù fraezh eo. Ar pal zo dieubiñ pobl Vreizh; ha roll an Emsav eo bezañ an dieuber; ouzh e lakaat war ur renk gant emsavioù-dieubiñ all ar bed e tiskouezer a-walc'h an argerzh a verker d'an dieubiñ : freuzañ ar sujerezh ha sevel ur riez nevez emren. En un taol emañ lezet e-biou an daou fazi bras a gontamm ar spered politikel brezhon abaoe an eil brezel bed :

- ar gempennouriezh, eleze krediñ e vo a-walc'h da framm politikel, pe armerzhel hepken, ar Stad C'hall bezañ kempouezet, diwaret, digreizennet evit ma vo diskoulmet kudennoù Breizh (13);

- an emdarzhelouriezh, eleze krediñ e tarzh dioutañ e-unan an argerzh-dieubiñ diouzh kreizon an dud wasket evel un heuliad ret d'ar gwaskerezh. An emdarzhioù devoudet war-eeun gant ar gwaskerezh ne droont nepred e dispac'h drezo o-unan; evel arouezioù rakzispac'h-el e c'haller meizañ stourmadeg ar Bonedoù Ruz pe fourgaserezh ar gouerion en hor mare, met evel arouezioù hepken; evel devoudoù, ne c'hallent ket mont en tu all d'ar palioù darnel ha tremeniat a oa o re. Ne zeuy an dispac'h a ragaroueziont nemet dre an embregerezh end-eeun en devo e brientet gant rat; e-touez soudarded an dispac'h e vo fourgaserion hiziv, bleniet avat gant "gward-araok Breizh", an Emsav (14).

Ur gwall vicher eo bezañ un emsav-dieubiñ, ha moarvat he deus an U.D.B. pouezet mat al lodenn a zibabe. Un embregerezh hirdermen eo, pa'z eo an dispac'h nebeutoc'h diskar ar stad kozh eget savidigezh ar stad nevez. Evit da Vreizh bezañ ur vro vihan ez eo ramzel al labour da seveniñ, rak n'eo ket hepken ar frammoù politikel a vo da grouiñ, met, - an U.D.B. n'hon dislavaro ket, - ar frammoù kevredigezhel, ar frammoù armerzhel, ar frammoù sevenadurel, ha diwar o diazezoù donañ. N'en em douellomp ket, e karg an dispac'herion o-unan e vo al labour-se, dezho d'e seveniñ en ur par berr moarvat. Poent eo dilezel pep lentegezh ha pep termerezh evit stagañ ganti.

Stagañ ganti zo da gentañ gwriziennañ en Emsav, da lavarout eo a) kemer da bal e bal, savidigezh ur vroad nevez e Breizh b) kemer da dremenad e dremenad, n'eo ket hepken an endoniad bev (15) ma furmomp diwarnañ hon ober, met ivez ar peurrest, ar pouezioù marv, ar marevezhioù du, ar fazioù, ar sottoni, ar vezh, - ar gwir en deus an emsaver da varn kement-se, rak un emvarn eo neuze a ra.

#### Ar sokialouriezh

Poent eo lezel al lentegezh amañ ivez. Emañ an den brezhon nevez en ur redi-a-vuhez da sevel e gumuniezh vroadel, rak ned eo

ket evit tennañ e anal en hini gozh, - unan a zaou, pe e varvo mouget enni, pe e freuzo anezhi. Evel an U.D.B. e soñjomp ne c'hell ket ar Stad Vrezhon, diazez pleustrek ar gumuniezh vrezhon nevez, bezañ forzh petore Stad. Hent an U.D.B. avat n'eo ket kilañ rak ar Stad Vrezhon, met prientiñ frammoù sokialour dezhi. Hent an emsaver sokialour n'eo ket diwriziennañ diouzh an Emsav, met er c'hontrol kas e wrizioù en Emsav pelloc'h war-du glad an ober hollvedel : dre an Emsav e tremen hent ar sokialouriezh e Breizh.

Distreiñ a reomp d'ar poent-mañ hag e pouezomp warnañ : an emskiant vroadel a zeu d'ar Brezhon da heul un dispac'h en e vuhez a zistruj enni an tremened estren hag a laka en e lec'h tremened an Emsav. Dre an dispac'h-se, dre an treuzvoudadur-se, e vez ganet an den brezhon nevez. Kement luskad na gemer ket diazez war dud nevezet en doare-se zo tonket da chom e toull dor an Emsav ha da c'hwitañ. Stad Israel ne c'hoarvezas nepred eus ar Yuzevion chomet er Stadoù-Unanet pe e Rusia, met a Yuzevion o doa treuzet ar bed evit en em ziazezañ war zouar o bro. Heñveldra, ar Stad Vrezhon hag he rakfurm, an Emsav, ne c'hoarvezo ket a C'hallaoued mui pe vui libistret a vreizhegezh, met a Vrezhoned o devo treuzet o bed-kent evit en em ziazezañ el lavar hag en ober emsavel (16).

Emdroadur an U.D.B. a fell deomp kompren evel ar youl da wriziennañ en Emsav ha da reiñ da drede ger hec'h anv un dalvoudeg-  
ezh istorek, ha n'eo ket hepken unan douaroniezhel. Dav eo d'an Emsav mont betek ar penn, ha buan bremañ : evitañ ne oufe an demokr-  
atelezh bezañ an emzalc'h demokratel hepken, met netra nebeutoc'h eget ar riez demokratel brezhon.

(1) ABERWAN, Emdroad an Emsav, Ar Vro 1-1967/63; id., Kleiz ha Breizh, Al Liamm 121/180.

(2) Charte, Le Peuple Breton 1/1.

- (3) A-zivout an enebadur douaroniezhel - istorek, sl. G.ETIENNE, Isdiorreadur ha Bredoniezh, Preder 84-85/45, ha p.56 pergen.
- (4) Charte, Le Peuple Breton 1/1.
- (5) Sl. Hag-eñ ez eus ur gudenn eus an teodyezhoù e Breizh, Emsav 4/82.
- (6) Sl. Hag-eñ ez eus ur sevenadur brezhon, Emsav 2/5.
- (7) Sl. Penaos anaout an Emsav war an dachenn ?, Emsav 7/168.
- (8) Sl. Al ledemsavioù, Emsav 5/113.
- (9) Sl. Pelec'h gwriziennañ ?, Emsav 6/129.
- (10) Sl. An Emsav evel ober hag evel Istor, Emsav 5/105, ha p.106 pergen; Penaos anaout an Emsav war an dachenn ?, Emsav 7/168.
- (11) ABERWAN, Kleiz ha Breizh, Al Liamm 121/181.
- (12) id., ibid., /193.
- (13) Sl. Y.OLIER, Teskad skridoù politikel, Preder 37-38/passim, ha dreist-holl ar pennadoù : Politikerezh rannvroel pe disrannouriezh p.75, E sigur kevredadelouriezh p.81, Peoc'h ha Brezel p.103, ha pp.112-120 pergen; Hag-eñ e c'hell an Emsav kaout ur politikerezh diavaez war hir dermen ?, Emsav 7/161, ha p.163 pergen.
- (14) Sl. LENIN, Petra ober?1902, ha dreist-holl ar Pennad 2 : Emdarzhegezh ar yoc'h hag emouiziegezh ar sokialdemokratiezh.
- (15) evel (10) hag ivez Lec'h Gwalarn en Emsav, Emsav 6/137, ha dreist-holl ar rannbennad Gwalarn hag an Emsav p.142.
- (16) evel (10).

"Ha deomp e vo un doare evel unan all da stourm ouzh an impalaerouriezh c'hall e Breizh strivañ da zistrujañ mojenn ar 'Frañs reizh ha denel' ha diskouez ne voe unvaniezh Breizh ha Bro-C'hall nemet ur wir aloubadenn gant an holl heuliadoù a zlee dont war-lerc'h..."

Yann SOHIER, Ar Falz 9, Du 1933.

N O T E N N O U      A R M E R Z H E L      ( 7 )

ELFENNOU AR C'HENDERC'HAÑ

Kenderc'hañ, en ur ster ledan, zo krouiñ madoù. En ur ster resisoc'h, armerzhel, ez eo unaniñ danvezioù kemeret er bed, reiñ dezho un aoz nevez, ur pleusk, hag o degas d'al lec'h ha d'ar mare m'o deus ar vevezerion ezhomm anezho. Kenderc'hañ zo enta krouiñ ar pezh a c'hell bastañ da ezhommoù ar vevezerion, - pe, ent-verr, krouiñ bastusterioù nevez.

Digant ar c'henderc'hañ e c'houlenn ar bevezer ma kinnigo dezhañ madoù o vastañ d'e ezhommoù; e c'houlenn ar c'henderc'her ma tegaso dezhañ buzadoù, da lavarout eo gounidoù arc'hant; hag ar gevredigezh, ma vo brasoc'h gwerzh ar madoù kenderc'het eget gwerzh ar madoù bevezet e-ser kenderc'hañ.

Mar goulenner : petra zo ezhomm evit kenderc'hañ ? e c'haller ober daou respont disheñvel : a) tud, - rak an dud hepken zo gouest da genderc'hañ er ster strizh; nerzhoù an natur, ha pa ve re al loened, ne genderc'hont ket b) teir elfenn-diazez : an natur, al labour, ar c'hevala. Anv a ra ar respont a) eus an dud evel labourerion pe evel perc'henned an natur pe evel danzeerion pe dastumerion gevala, da lavarout eo eus obererion ar c'henderc'hañ; ar respont b) a laka a-wel elfennoù ar c'henderc'hañ.

Al labour.

Evit an armerzhourion, e labour un den pa bleustr da genderc'hañ ur mad pe da seveniñ ur gwazad (1).

Gwelet hon eus uheloc'h keal bastusted ar madoù; sellet e c'hell bezañ evel ur broud da genderc'hañ. Gant al labour en enep

e kaver ur perzh a zo un harz da genderc'hañ : ar vreüsted. Lavarout ez eo breüs al labour zo kement ha lavarout ez eo poanius, skuizhus, hag e kresk ar boan hag ar skuizhnezh bep ma kresk padel-ezh ur pennad labour, - betek bezañ un harz o virout ouzh al labourer a zerc'hel gant e drevell.

Boas eur da zigemmañ al labour\_gremmel, anvet c'hoazh labour kigenneel, a c'houlenn dreist-holl e nerzh fizikel digant an den, hag al labour\_stlennel, pe labour kefredel (2), a zo un obererezh studiañ, prientiñ, ijinañ, urzhiañ.

Rannadur al labour zo bet unan eus heuliadoù ar greantelaat. E-lec'h ma veze un dornwezhour o kas da benn e-unan an holl oberatadurioù ret da genderc'hañ un draezenn, e laka ar greanterezh meur a vicherour fiziet e pep hini un oberatadur hepken, pe ur rann oberatadur a-wechoù ken dister ha stardañ ur serjant. Kemeret e vez seurt labour\_diouzh ar stlej (an traezoù a oberier o vezañ stlejet lerc'h-ouzh-lerc'h hag ar vicherourion o kas pep a hevelep jestr war bep hini) da arouez an ijinerezh greantel. Danvez ur skiant eo deuet da vezañ rannadur al labour : an urzhiaataerezh. An diazezer anezhi, an ijinour amerikan F.W.TAYLOR, a studias eilenn dre eilenn jestroù ar vicherourion a-benn dizoleiñ ar fiñvadennoù didalvez ha diraez an ampled uhelañ. Gant diskibion TAYLOR, ar gall FAYOL da skouer, e voe astennet an urzhiaataerezh d'al labour stlennel e-unan. Splet rannadur al labour eo arboellañ an amzer hag an arc'hant. Gweredoù noazus en deus avat war ar vicherourion na gavont en un trevell unton, skuizhus, pennveudus, na levenez-krouiñ na ster buhezel ebet.

E doareoù all e vez hiziv kaset rannadur al labour : e par ar riezoù o-unan. Hogos an holl Stadoù bremañ a sav, bep daou, pemp, c'hwec'h pe zek vloaz, steuñvoù (3) a zo o fal raktresañ dre ar munud emdroadur o armerzh e-doug ar bloavezhioù-se. War un dro e tasparzhont o ziriegezh (4) e ranndirioù, anvet ranndirioù steuñvel,

palioù armerzhel pep hini o vezañ diferet gant ur gevrenn eus ar steuñv hollet, e doare ma vez ivez "rannet al labour" etre rannbarzhioù ar vro, unan o vezañ galvet d'ar gounezerezh, unan all d'an ijinerezh ponner, unan all c'hoazh d'an ijinerezh pleuskañ. Diawelout a reer ar mare ma vo renet rannadur al labour, pe gentoc'h ma vo steuñvet an armerzh war c'horreenn a-bezh ar blanedenn.

### Dasparzh ar boblañs diouzh al labour

Annezidi ur vro, pe er yezh resis an "hiniennoù armerzhel" a renker e meur a zoare diouzh ma seller ouzh ar perzh a gemeront er c'henderc'hañ ha diouzh ar modoù ma kemeront perzh ennañ.

- ar boblañs-labour, pe dud-labour, a reer eus an holl dud dezho ur vicher; evel tud divicher e konter ar vugale, ar merc'hed a chom er gêr, al leveourion, an dud klañvdiet, ar brizonidi, h.a.

- ar boblañs dezhi gourc'hwel (5), pe c'hourc'hweleion, a reer eus an dud a zo o labourat e gwirionez, a zo gant ur gourc'hwel, en ur mare lavaret. An diforc'h niverel etre ar boblañs-labour hag ar boblañs dezhi gourc'hwel a verk niver an dud dilabour, pe dic'hweleion, en ur mare. Tri seurt dilabour, pe dic'hwel, a studier : a) an dilabour tuezet (6), pa zeu da heul gorrekaat an oberiadegezh armerzhel b) an dilabour kalvezoniel, pa'z eo heuliad d'an araokaat kalvezel k) an dilabour kendroel, p'emañ a-geñver gant kendro ar boblañs-labour : re yaouank nevez deuet e nevid al labour, labourerion o kemmañ gourc'hwel pe vicher, h.a. Ur furn all a anavezer d'an dilabour, an dilabour-arc'hañ, pe harz-labour, pe c'hoazh ec'hwel, pa nac'h ar vicherourion pe c'hourc'hweleion labourat a-benn kaout doareoù-gourc'hwel (goproù, h.a.) gwelloc'h.

- dasparzhañ a reer ar boblañs-labour hervez ar micherioù; setu da skouer an dasparzh arveret e Frañs : tieion, gwezhourion-douar, embregerion ar greanterezh pe ar c'henwerzh, sternioù uhel ha micherioù frank, implijidi, sternioù etre, micherourion, koskor ar

gwazadurioù, kloer, luoz, kerreizh;

- un dasparzh armerzheloc'h avat eo an hini diouzh an tri gennad kentael, eilvedel ha tredeel (sl. Emsav 5/119).

Kudennoù-bremañ al labour greantel

Meur a gudenn armerzhel, kedvuhez, politikel a sav en hor mare e pep bro e-keñver urzhiadur al labour ha buhez al labourerion. N'eus ket unan avat a ve ken hollvedel ha ken gwaskus ha kudenn an araokaat kalvezel.

Gant prantad kentañ ar Reverzhi C'hreantel, a anver c'hoazh reverzhi c'hremmel e teuas an ijinenoù da gemer lec'h kigennoù al labourerion; en eil prantad, pe reverzhi stlennel a anavezomp bremañ, e teu an ijinenoù da gemer lec'h empennoù o-unan an dud : an ijinenoù treloc'hek o doa sammet kefridi an darbarerion, an ijinenoù tredanek a samm hiziv kefridi ar galvezourion hag an ijinourion. Bennoz d'an elektronik e teu ar c'henderc'hañ da vezañ emgefreak, - e marevezh an emgefren emañ ar greanterezh. An heuliad anatañ zo an dilabour a-yoc'h : daou zen zo a-walc'h hiviziken e-lec'h ma oa ezhomm 200 a-raok. E-kichen an heuliad kevredigezhel splann-se ez eus unan all, donoc'h ha grevusoc'h, buhezel : mab-den n'en deus mui koulz lavaret perzh ebet el labour-kenderc'hañ, hemañ o vezañ fiziet en ijinenoù emgefreak. Anat eo ne zianko mab-den diouzh an enkadenn griz-mañ nemet dre ur reverzhi en e zoare da veizañ ar gedvuhez : "Gant ar reverzhi gentañ e voe didalvoudekaet brec'h an den (); an eil reverzhi a zegas didalvoudekadur empenn an den, da nebeutañ en e ziferadennoù eeunañ ha boasañ. Evel just, ar vailhed, ar mestr kalvez, an treloc'her ampartañ, an uhelwrier o deus dreist-bevet d'ar reverzhi gentañ, hag heñveldra e treistvevo d'an eil ar gouezoniour arroutet hag ar meradurour akuit. Neoazh, mar seller ouzh an eil reverzhi-mañ en he finvez, e ranker anzav n'en devo an den keitat, donezonet-etre pe nebutoc'h c'hoazh, netra ken da werzhañ hag a dalvezfe an arc'hant en devo forzh petore prener da

lakaat. Ar respont evel just eo e ranker kaout ur gevredigezh diazezet war dalvoudoù denel na vint ket ken talvoudoù ar prenañ hag ar gwerzhañ..." (7).

### An natur.

Dre dermenadur ez eo an natur ar pezh a vez anezhañ a-raok pep embregadenn eus mab-den, da skouer gwrez an heol, donezonoù ar spered. Koulskoude, pa lavar an armerzhourion an natur, e soñjont da gentañ, ma n'eo ket hepken, en douar. Diforc'h-mat eo diouzh elfennoù all ar c'henderc'hañ :

- n'eo ket ur c'henderc'had; o kentvezout emañ, hag o padout;
- an dachenn eo a zegemer enni holl obererezhioù an armerzh;
- dioutañ e vez tennet an danvezioù krai, pe diouzh e gondon (kailhennoù), pe diwar e atiloù (trevadoù); pourchas a ra ivez ar gremm daspugnet diwar wrez an heol (glaou, tireoul, tredan) pe endalc'het en e zanvez (gremm atomel).

Diouzh ar c'heñverioù etre mab-den hag an douar, elfenn badus, kendalc'hel ha bevnet, ez eo diwanet ensavadur ar berc'hentiezh; an douar, sellet evel tra perc'hennet, a reer anezhañ ar glad. Disheñvel-bras eo bet doareoù ar perc'hennañ hervez ar sevenadurioù; en hor grez ez eo anavezet ar berc'hentiezh prevez gant un darn vras eus ar broioù; ar riez kentañ e voe U.R.S.S. o freuzañ perc'hentiezh prevez ar glad hag ouzh e lakaat da berc'hentiezh-Stad.

Ar c'heñverioù etre an douar hag an armerzh a studier e-ser an douaroniezh armerzhel, a zo he c'hefridi deskrivañ an armerzh hervez al lec'hioù, ar broezioù, ar riezoù.

Diwar studi an douaroniezh armerzhel ez eus deveret un ouezoniezh all, an egoroniezh armerzhel, pe armerzhegoroniezh. Ar "c'hartennoù" savet ganti ne vez ket warno an douaroù hag ar stummadurioù douaroniezhel boas, met ar c'hreizennoù armerzh hag an tachennoù-levezon a ziorreont en-dro dezho hag etrezo. Dre-se ez eur

deuet da boellata war un "egor armerzhel" disheñvel-krenn diouzh an egor naturel ha meizadus hepken dre ar jedoniezh.

### Ar c'hevala

Meur a zoare zo da gompren ar c'hevala. Amañ ne studiimp nemet daou anezho : ar c'hevala evel benveg-kenderc'hañ, da lavarout eo evel danvez kalvezel, hag ar c'hevala evel danvez jederezhel (8).

#### Ar c'hevala evel danvez kalvezel

Kevala a reer eus ar madoù kenderc'het e sell da genderc'hañ madoù all. Etre pevar rumm e c'haller rannañ ar c'hevalaoù :

- a) an nerzhoù naturel bet mestroniet gant mab-den, evel al loened-labour, al lammoù-dour krouet pe aveet evit kenderc'hañ tredan;
- b) ar binvioù, an ijinenoù, ar benvegijinenoù o talvoud d'ar gounit-douar, d'an oberiañ traezoù, d'an dezougen;
- k) an adeiladoù-kenderc'hañ, evel savadurioù un atant, ur greanti, un ospital;
- d) an danvezioù krai pleusket (an dir, an neud, ar plenk, ar mein benet).

Elfennoù ar c'henderc'hañ a c'hoarvez eus div elfenn andonel, an natur hag al labour, hag eus un elfenn deveret, ar c'hevala. Ur skouer eeun a roio da gompren an diforc'h-se : un den o troc'h-añ ur walenn evit diskar avaloù. Luniет eo an natur amañ gant an avaloù er gwez; al labour, gant div embregadenn : troc'hañ ar walenn, gwalennañ ar frouezh; ar c'hevala, gant ar walenn hec'h-unan, benveg kenderc'het e sell da genderc'hañ madoù all.

Kompren a reor ivez penaos e c'hell an hevelep mad bezañ diouzh an degouezh pe gevala, pe vad-beveziñ. Mar bez debret an avaloù ur wech dastumet, ez int madoù-beveziñ. Evel ur c'hevala avat e seller outo, mar o lakaer a-gostez evit ober sistr.

Azonet e oa kevredigezhioù an oadvezh rakgreantel gant kementad bihan o c'hevalaoù. Da heul ar Reverzhi C'hreantel e kreskas a-vras an araezioù-kenderc'hañ. Greantioù ramzel enno ur binviadur kemplezh o deus kemeret lec'h stalioù an dornwezhourion gant o dornad ostilhoù

eeun. An heuliad kedvuhezal pennañ da hevelep stad a draoù<sup>1</sup> eo hemañ : ret eo da gentañ amparañ ur yoc'h vras a gevala (greantioù, ardiv-inkoù) ha dre-se e vez un dale hir pe hiroc'h etre derou an embregadenn, - mare ma vez ezhomm eus an arc'hant, - hag an disoc'h anezhi, - mare ma krog ar madoù kenderc'het da vont e gwerzh; dav eo neuze d'an embreger kaout en e gerz en a-raok un tamm mat a binvidigezh; dav enta d'un nebeut tud bezañ perc'hennet war un darn vras eus pinvidigezhioù ar vro. Kompren a reer penaos e voe an oadvezh greantel war un dro an oadvezh kevalael, ha, da nebeutañ en e zerou, oadvezh ar gevalaourion. An armerzhioù sokialour o deus diberc'hennet ar gevalaourion a-benn lakaat ar c'hevalaoù e kerz ar gumuniezh vroadel hag e perc'hentiezh ar Stad. Gant an ezhomm da greskiñ bepred muioc'h ar c'hevalaoù e kemer ar riezoù lavaret kevalaour pe frankizour un hent heñvel, ar Stad o kemer brasoc'h emell bemdez en embregerezhioù hag ouzh o ferc'hennañ.

Danzeadur ar c'hevala.

Danzeet e vez ar c'hevala diwar an arboelladoù. Mar tenn ar pesketaer muioc'h a besked eget m'en deus ezhomm evit e vevañs, e c'halla prenañ ur roued gant gwerzh an dreistad. Ne vevezo ket e besketadenn a-bezh, hogen arboellañ a ray ul lodenn anezhi a vo postet en ur benveg nevez, da lavarout eo lakaet da greskiñ e gevala.

Krouiñ ur c'hevala nevez a ampleg enta a) ur c'henderc'hañ dreist d'ar beveziñ, da lavarout un arboellañ b) lakaat an dreistad arboellet da dalvezout d'ur c'henderc'hañ nevez, da lavarout eo postañ. Ar feur-postañ zo ar c'heñver etre an arboell postet hag ar c'henderc'h; da skouer, feur-postañ Japan, unan eus ar re uhelañ er bed, a ziraezas 34 % eus ar C'henderc'h Broadel e 1962-1964; da gompren eo evel-henn : war 100 \$ madoù kenderc'het e veze arboell-et ha postet 34 \$ en embregerezhioù-kenderc'hañ.

Lakaat arc'hant a-gostez, e verniañ hep e lakaat en amred (9) en-dro, n'eo ket arboellañ ken, met teñzoriant.

An ijinennoù

Gwelet hon eus ar perzh o deus bet an ijinennoù e treuzfurmidigezh doareoù al labour hag ar gedvuhez da heul. Kemmadennoù ken bras all o deus degaset e doareoù ar c'henderc'hañ.

Rannañ a reer an ijinennoù en a) ijinennoù-luskañ (ijinenn dre vurezh, troellerez dre vurezh pe dre zour, kefluskerioù dre helosk liñvel pe aezhel, kefluskerioù tredan, troellzazloc'herioù, h.a. b) ijinennoù-labour, lusket gant ar re gentañ (trebarzherez, kevierez er mengleuzierezh; fornioù, pontoù-ruilh, horzherezed er vetalouriezh; ijinennoù-moulañ, h.a.)

Dre berzh hevelep ardivinkelezh

- eo bet kresket ar c'hehenterezh ha dre-se n'eo ket ken ar pellder ur skoilh d'an armerzh : hiziv e c'hell forzh petore ijinerezh bezañ ensezet forzh pelec'h er bed;

- eo bet kresket a-vras kementad an traezoù kenderc'het, hag ivez ar berzhegezh (10) anezho; digresket eo bet o frizioù. Roomp ur skouer. Er prantad rakgreantel e oa 118 h an amzer geitat ret da oberiañ un arar, evit ur priz-koust a 54,5 \$; hiziv ez eo 3 h 45 mn an amzer geitat-se, ha 8 \$ ar priz-koust daoust ma vez gopret ar vicherourion 5 gwech uheloc'h.

Ar c'hevala, danvez jederezhel (8)

Kevala ha korvoder.

Ar madoù n'int madoù nemet peogwir e talvezont d'an dud o deus anezho en o c'herz. E-kichen keal ar madoù enta e ranker termenañ keal an talvezadoù a zeu diouto. Un ti-annez a dalvez da lojeiz d'an dud a zo o chom ennañ; al lojeiz eo talvezadur an ti. Muzul an talvezadur-se eo an talvezad. Mar bez feurmet an ti 2 000 F dre vloavezh, e lavarer ez eo 2 000 F talvezad bloaziek an ti-se.

An diforc'h-se etre mad ha talvezad a ro deomp da veizañ an diforc'h etre kevala ha korvoder :

- ar c'hevalaoù zo madoù danvezel, piaouet gant perc'henned; ar

c'horvoderioù zo an talvezadoù a denner eus ar madoù-se : talvezadoù traezel pa vezont tennet war-eeun (da skouer pa annezzer en ti, pa c'hounezzer ur park); talvezadoù gwerzhel pa eskemmer ouzh arc'hant an talvezadoù traezel (da skouer pa roer e feurm an ti, ar park, pe c'hoazh pa werzher eostoù ar park);

- kevala un den zo hollad an traoù danvezel piaouet gantañ en un ampoent lavaret; d'ar 1<sup>añ</sup> genver da skouer ez eo perc'henn d'un atant, anezhañ un ti-annez, tiadurioù-korvoñ, arrebeuri, ardivinkoù, chatal, trevadoù sanailhet, h.a. : ar rollad-se a reer anezhañ e gevala traezel. Mar merker, e-lec'h ar rollad traezoù-se, sammad ar gwerzhioù anezho, e veneger e gevala gwerzhel.

En enep d'ar c'hevala a zo bepred kevala un ampoent, ez eo ar c'horvoder korvoder un taluad termenet : ur bloavezh, ur mizvezh, ur sizhunvezh. En e vloavezh en deus ar gounideg eostet dek tonenn winizh, maget 20 penn-bioù : an talvezadoù diouzh ar madoù-se eo e gorrerder. Ar c'hargiad a c'hounez 15 000 F bep bloaz; ur perc'henn a ro e rannidi e feurm evit 5 000 F ar bloaz o deus ar gwerzhioù-se da gorrerder.

#### Kevala jederezhel.

Kontoù un embregerezh a lakaer war zaou vann, anvet Diwan ar bann kleiz, Fred ar bann dehou. Er bann Diwan e verker gwerzh ar madoù perc'hennet gant an embregerezh, priziet da geñver ar renabloù; er bann Fred e verker gwerzh kevala an embregerezh, da lavarout eo dre dermenadur gwerzh madoù an embregerezh da geñver ar renabl kentañ. Reolenn gempouez ar jederezh a c'houlenn ma ve mentelet an diwan hag ar fred, da lavarout eo kevatalet ar gwerzhioù merket en daou vann. Da bep renabl e vez priziet an ijinenoù hag ar binviadur en ur zerc'hel kont eus an amzer ma vint en arver : un ijinenn a vo aet e-maez arver goude 10 vloaz a vo lakaet da goll un dekvedenn bep bloaz eus he friz er renabl; seurt jedadur, a zo kenkoulz ha lakaat a-gostez an dekvedenn eus gwerzh an ijinenn bep bloaz, a anver ardaladur; drezañ e vez ardalet ar c'hevala. Kemeromp skouerioù:

Mentel I (derou) 01 01 67

<u>Diwan</u>	<u>Fred</u>
1 000 000	Kevala : 1 000 000
Goude ur bloavezh e renabler madoù an embregerezh :	
1 300 000	Kevala : 1 000 000

Dre un taol-jederezh e tegaser ar c'hempouez en-dro, o lakaat ur reñverad da anadiñ er bann Fred. Ar reñverad a verk ar c'horvoder.

Mentel II 01 01 68

<u>Diwan</u>	<u>Fred</u>
1 300 000	Kevala : 1 000 000
	Reñverad : <u>300 000</u>
1 300 000	1 300 000

Mar befe renablet an diwan bihanoc'h eget an diwan-kent, e lakafe an taol-jederezh-kempouezañ un divigad da anadiñ er bann Diwan.

Mentel II\* 01 01 68

<u>Diwan</u>	<u>Fred</u>
Renabl : 800 000	Kevala : 1 000 000
Divigad : <u>200 000</u>	
1 000 000	1 000 000

Tro hor bo da studiañ diwezhatoc'h meizadurioù all eus ar c'hevala : un danvez kemplezh-meurbet eo e gwirionez.

- (1) Gwazad eo kement labour sevenet evit mad unan bennak.
- (2) Kefredel ag., diwar-benn labourioù ar spered.
- (3) Steuñv g., raktres, peurliesañ armerzhel.
- (4) Tiriegezh b., douar ar vro sellet evel dalc'h ar riez.
- (5) Gourc'hwel g., implij evit un den en un embregerezh.
- (6) Tuez g., emgav armerzhel.
- (7) N.WIENER, Cybernetics..., 1948.
- (8) Jederezh g., konterezh; jedour g., dalc'her-kontoù, konter.
- (9) Amred g., red ar madoù, an arc'hant e-ser an obererezh armerzhel.
- (10) Perzhegezh b., perzhioù mat pe fall un den, un dra.

K E M E N N O U      A - B E R Z H . . .S. A. D. E. D.

## BANVEZ E KALLAG D'AR 6 A VIZ EOST 1967

Evit lidañ diwezh ar 5<sup>t</sup> bloavezh-skol en em gavo skolidi, kelennerion, izili ha skoazellerion S.A.D.E.D. d'ar 6 a viz Eost 1967 e Kallag, kavell ar Strollad. Emvod da 11.00 h en Ostaleri Monfort.

Degemeret e vo an enskrivadurioù gant :

S.A.D.E.D., 30, Place des Lices, 35-RENNES

betek an 24 a viz Gouere 1967.

K E L C ' H      D E B A U V A I S

## KAMP YAOUANKIZ VREIZH

## E MENEZ-KAMP EUS AR 16 D'AN 27 EOST 1967

Eus ar 16 d'an 27 Eost 1967 e vo aozet e Menez-Kamp, dindan baeroniezh KELC'H DEBAUVAIS, ur skol-hañv evit paotred vrezhonegerion etre 11 ha 16 vloaz.

Evit kaout diskleriadurioù, skrivañ d'an

Dim. M.-E. MAZE, KELC'H DEBAUVAIS,  
30, Place des Lices, 35-RENNES.

Ar gerent a garfe fiziout o bugale e Kamp Yaouankiz Vreizh a c'hell goulenn emgav digant an Dim. M.-E. MAZE.

S. A. D. E. D.

## C'HWEC'HVET BLOAVEZH SKOL

Padout a ray adalek an 24 eost 1967 betek an 18 ebrel 1968. Klozet e vo ar marevezh enrollañ d'an 20 eost 1967.

Daouzek rummad kentelioù zo war ar roll-kelennadurezh. Gwirioù-enrollañ : 30 F dre rummad.

Evit enrollañ, skrivañ da :

S.A.D.E.D., 30, Place des Lices, 35-RENNES.

